

Nevez amzer ar brezhoneg



Nac'het-kenn e oa bet gant ar C'huzul-Stad, d'an 29 a viz du tremenet, degemer e c'hellfe ar brezhoneg bezañ implijet da venveg an deskir hag an darempredou publik, da lâret eo kement tra a zo ret evit ma vo kelennet hor yezh en ur mod efedus, evit ma c'hellfe ar vugale derc'hel d'ober ganti, hag evit ma chomo bev sevenadur Breizh.

- En ur lakaat en arvar ar c'helenn divyvezhek par-ouzh-par a vez kaset war-raoK abaoe 20 vloaz en deskadurezh-Stad hag er skolioù katolik, hag en ur stankañ an hent outañ er skolajoù hag el liseoù,
- En ur nac'hañ reiñ d'ar c'helenn divyvezhek dre soubidigezh ur statud o kadarnaat tal-voudegezh ha disoc'hou frouezhus al labour bet kaset gant ar skolioù Diwan abaoe 25 bloaz.

Ne c'helle ket ar C'huzul-Stad lakaat splannoc'h war-wel penaos n'eus diouzh mellad 2 ar Vonreizh (1992) ha diouzh al lezenn "Toubon" (1994) nemet armoù evit distruj ar yezhoù minorelaet.

N'eus tamm dazont ebet eta, d'ar brezhoneg ha d'ar sevenaduriou all, gwasket er Frañs keit ha ma chomo ar Vonreizh hag al lezennou evel m'emaïnt.

E keit-se emañ ar Stad c'hall o c'houlenn digant ar broioù a fell dezho bezañ perzh eus Unvaniezh Europa d'o zro, doujañ d'an emglevioù etrevroadel a warez ar sevenaduriou

hag ar yezhoù liesseurt, dres pa n'he deus-hi nemet dismagañs oute war he zachenn, en despet da evezhiadennoù groñs an UNO (miz du 2001) ha Parlament Europa (Genver 2003).

E keit-se ne oar e mod ebet an 2 600 bugel degemeret gant ar skolioù Diwan ha gal-lout a-rafont derc'hel da zeskiñ brezhoneg da vad en un tu bennak.

E keit-se e vez roet d'an holl da grediñ, gant marc'hadourien an abadennoù meur, e vije diouzh hon sevenadur keltiek, unan doujet hag e kreiz e barr.

N'omp ket evit gouzañ ken e vele bac'het ar brezhoneg er skol hag er gevredigezh gant reolennigou strizh ha bresk.

Abalamour da gement-mañ e c'halvomp an holl da vanifestiñ

- Evit ma vo anavezet ha gwarezet ar yezhoù minorelaet gant ar Vonreizh, evel m'eo dleet, a-skwer gant al lezennou etrevroadel hag evezhiadennoù an UNO,
- Evit ma c'hello pep hini deskir ar yezhoù choazet gantañ hag ober gante bemdez e lec'h ma kar,
- Evit ma vo barrek Kuzul rannvro Breizh da reiñ d'ar brezhoneg ha d'ar sevenadur a ya d'e heul, ar plas a zo dleet dezho er gevredigezh,
- Evit ma vo anavezet ez-ofisiel ar c'helenn divyvezhek dre soubidigezh,

Traduction en français au verso

Appel à tous ceux qui refusent la discrimination linguistique au
Printemps de la langue bretonne

MANIFESTATION

le 22 mars 2003 à Rennes

(Rassemblement à 15h00, Place du Parlement de Bretagne)

- Pour que la Constitution reconnaissse et protège les langues minorisées, conformément au droit international et aux recommandations de l'ONU,
- Pour que chacun puisse apprendre les langues de son choix et les pratiquer librement dans sa vie quotidienne,

- Pour que le Conseil Régional de Bretagne dispose des moyens de garantir l'avenir social de la langue bretonne et de la culture vivante qu'elle inspire,
- Pour la reconnaissance officielle de la pédagogie par immersion.

DIV YEH

(association des parents d'élèves pour l'enseignement bilingue à l'école publique)

DIHUN

(association des parents d'élèves pour l'enseignement du breton dans l'enseignement catholique)

DIWAN

(écoles bilingues immersives en breton)

UGB

(Union des Enseignants de breton)

Kuzul Sevenadurel Breizh

(Conseil Culturel de Bretagne)